

LEVRIK

BREURIEZ AR FAMILL ZANTEL



Famill .....

'zo he n'em voestlet da Famill Zantel Nazareth,

d'..... a viz..... 19.....

Parrez .....

Rener ar Vreurlez,

---

## BREURIEZ AR FAMILL ZANTEL

---

### I

Perak eo bet savet ar Vreuriez.

An devoision d'ar Famill Zantel, Jezuz, Mari ha Jozeph, 'zo abaoe pell amzer en Iliz. Ar Vreuriez savet dindan ho hano, evit unani etrez-ho an tiegeziou kristen goestlet da Famill Zantel Nazareth, aotreet gant ar Pab Pi IX er bloavez 1870, 'zo bet reizet a nevez gant Hon Tad Santel ar Pab Leon XIII, en eul lizer skrivet d'ar 14 a viz Even 1892. Vikel Jezuz-Krist var an douar a c'houlenn ma vezo skignet er bed katholik oll ar Vreuriez devot-ma, rak m'eo talvouduz braz evit miret, gant doujans Doue, ar peoc'h en tiegeziou ha dre eno an urz vad er vro.

An oll gristenien, n'euz fors a be stad, a gavo er Famill Zantel peadra d'ho foulza ha d'ho delc'her var an hent mad : Jozeph ha Mari a zesko d'ar pennoñ tiegez, d'ar gerent, beza soursiuz e deveriou ho c'harg; Jezuz 'vezo evit ar vugale hag an dud iaouank eur skuer dispar, divin, a zentidigez hag a zoujans. Ouspenn, nep a boanio da gerzet var ho roudou hag a vezo aketuz d'ho fedi a resevo digant Jezuz, Mari ha Jozeph grasou puill ha nerzuz evit beva hervez lezen Doue er bed-ma ha gounit ar Baradoz.

### II

Penaoz eo renet ar Vreuriez.

Epenn ar Vreuriez evit ar bed oll e ma ar C'hardinal Vikel Hon Tad Santel ar Pab, e Rom. E peb Eskopti, ar Vreuriez 'zo renet gant eur belek, hanvet evit kement-se gant an Aotrou n'Eskob.

Er parrezioù, ar Bersouned ebken 'zo karget da gemeret hanoioù tud ho farrez a c'houlenno mont er Vreuriez; bep bloaz, da viz Maë, ar bersouned a zigaso hanoioù ar genvreudeur nevez da Reper ar Vreuriez en Eskobti, evit ma vezint kaset da Rom.

### III

Petra 'ranker da ober evit beza er Vreuriez ha kaout perz en induljansou.

Evit beza e Breuriez ar Famill Zantel ha kaout perz en induljansou staget out-hi, pep penn-tiegez a rank :

1<sup>o</sup> Lakaat he hano var ar rollou miret evit kement-se e peb parrez, hag he n'em voestla gant tud he di d'ar Famill Zantel, ar pezh a heller d'ober er gear, pe en iliz dirak ar Persoun pe eur belek all euz he berz.

2<sup>o</sup> Red eo ma vezo en ti, var well d'an oll, imaj ar Famill Zantel a Nazareth, ha ma lavaro bemnoz oll dud an ti, dastumet dirak an imaj-se, eur bedenn bennak, mez kentoc'h an hini aotreet gant Hon Tad Santel ar Pab, hag ar *pedennou berr* merket var-lerc'h.

3<sup>o</sup> Bep bloaz, da c'houel ar Vreuriez, an oll tiegeziou goestlet a renevezo ho akt a gonskrasion d'ar Famill Zantel.

4<sup>o</sup> Ar gouel-ze a vezo great er parrezioù d'an *trede sul goude ar Rouaned.*

IV

Pedennou, merket gant Hon Tad Santel ar Pab,  
evit Breuriez ar Famill Zantel :

**PEDENN**

da lavaret evit he n'em voestla d'ar Famill Zantel.

O Jezuz, hor Zalver meurbed karantezuz, c'hui pehini, diskennet euz an env evit sklerijenna ar bed dre ho kelennadurez hag ho skueriou, eo plijet gann-eoc'h tremen an darnvuia euz ho puez e ti dister Nazareth, hag o senti ouz Mari ha Jozeph, oc'h euz santeleat ar Famill-ze a dlie beza skuer an oll diegeziou kristen, digemerit gant madelez hor famill a zeu hirio d'he n'em voestla oll d'eoc'h. Difennit-hi hag he diouallit : kreskit enn-hi ho toujans, gant peoc'h hag unvaniez ar garantez kristen, evit ma vezo henvel ouz ho Famill roet d'hezi da skuer a-berz Doue, ha ma vezo an dud 'zo enn-hi, oll gwitibunan, eüruz eun devez er Baradoz.

O Mari, Mamm karantezuz da Jezuz-Krist, hag hor Mamm, grit dre ho tousder hag ho madelez, ma plijo gant Jezuz hon digemer pa he n'em voestlomp d'hez-an, ha skuilla var-n'omp he vennoz hag he vadoberou.

O sant Jozeph, pried Mari ha tad mager da Jezuz, deuit dre ho pedennou d'hor zikour e oll ezommou an ene hag ar c'horf, evit ma hel-

limp a-unan gann-eoc'h hag ar Verc'hez gloriuz Vari, kana meuleudi ha bennoz da viken d'hor Zalver divin Jezuz-Krist. Evelse-bezet-great.

**PEDENN**

da lavaret bemdez dirak imaj ar Famill Zantel.

O Jezuz leun a garantez, oc'h euz dre ho vertuziou dispar ha skueriou ho puez kuzet santeleat ar famill ho poa dibabet evid-hoc'h var an douar, plijet gann-eoc'h teuler eur zell var hon hini, daoulinet ama diraz-hoc'h evit goulenn ho trugarez ; dalc'hit sonj, ni ho ped, eo d'eoc'h ar famill-ma, p'eo guir eo he n'em roet, he n'em voestlet d'eoc'h. Difennit anez-hi, o Done madelezuz, diouallit-hi eneb peb drouk, sikourit-hi en he ezommou, ha roit d'ez-hi ar c'hras da heulia bepred skueriou ho famill, evit ma kendalc'ho d'ho karet ha d'ho servicha var an douar, ha ma hello ho meuli da viken er baradoz.

O Mari, mamm dener, ni c'houlenn sikour digan-eoc'h, rak ma ouzomp pegen gallouduz eo ho pedennou var Galon ho Mab divin.

Ha c'hui ive, Patriarch eüruz sant Jozeph, sikourit ac'han-omp dre ho skoazell gallouduz, ha kinnigit hor goulenn da Jezuz dre zaouarn Mari ho pried dinam.

(300 devez induljans. LEON XIII.)

Pedennou berr da lavaret var-lerc'h.

Jezuz, Jozeph, (1) Mari, me 'ro d'eoc'h va c'halon ha va buez ;

(1) E Frans 'zo bet chenchet reiz d'ar pedennou-ze, en eur lavaret : « Jezuz, Mari, Jozeph. »

Jezuz, Jozeph, Mari, sikourit ac'han-non var va zremenvan ;

Jezuz, Jozeph, Mari, grit ma varvin en ho kompagnunez santel.

(300 devez induljans. Pi VII, 1807.)

Ar memez Pab Pi VII en d'oa, er bloaz 1805, aotreat ar bedenn-all-ma :

O Jezuz, Mari, Jozeph, roit d'eomp sklerijenn ha sikour, saveteit ac'han-omp. Evel-se bezet great.

(200 devez induljans.)

V

Induljansou staget ouz ar Vreuriezh.

a) Induljansou plenier.

Nep 'zo e Breuriezh ar Famill Zantel, gant kovez, konna ha pedi en iliz eur pennad hervez intansion Hon Tad Santel ar Pab, a hell gounit eun induljans plenier :

I. — D'an devez ma n'em voestlint en eur lavaret ar bedenn merket.

II. — D'an devez ma renevezint, bep bloaz, ho c'hon-sekrasion.

III. — Da c'houeliou hor Zalver : 1° Nedelek, 2° Sir-konsizion, 3° ar Rouaned ; 4° Pask ; 5° Iaou-Bask.

Da c'houeliou ar Verc'hez : 6° Konsepsion Dinam (8 Kerzu), 7° Ginivelez (8 Guengolo), 8° Annonsiasion (25 Meurs), 9° Purifikasion (2 C'huevrer), 10° Gouel Maria Hanter-Eost.

11° Da c'houel sant Jozeph (19 Meurs), 12° da Batronaj sant Joseph (trede sul goude Pask), 13° da zevez gouel Dimezi ar Verc'hez (23 Genver).

IV. — Da zevez Pardon ar Vreuriezh.

V. — Eur veach ar miz, en devez a blijo da bep hini,

gant ma vezer bet aketuz da lavaret asamblez dirak imaj ar Famill Zantel ar bedenn merket.

VI. — Da heur ar maro, ma ne heller na kovez na konna, gant ma vezo keuz d'ar pec'hejou ha ma lavarfer a galon, pa ne heller a c'henou, an Hanosantel a Jezuz.

b) Induljansou bihan.

I. — Kenvreudeur ar Famill Zantel, gant m'ho devezo keuz d'ho fec'hejou, ma vizitint an iliz parrez pe eun iliz all ha ma pedint eno evit silvidigez ar bobl kristen, a hello gounit eun induljans a 7 vloaz ha 7 gueach 40 devez.

Da c'houeliou : 1° Bizitasion, 2° Prezantasion, ha 3° Patronaj ar Verc'hez.

4° Be veach ma lavaro, gant keuz d'ho fec'hejou, tud an tiegez asamblez ar pedennou merket, dirak imaj ar Famill Zantel.

5° Be veach ma n'em gavo ar genvreudeur da bedi asamblez en iliz.

II. — Eun induljans a 300 devez, da nep a lavaro, dirak imaj ar Famill Zantel, ar bedenn merket gant ar Pab. Ar re ne helfent ket lavaret ar bedenn-ze a lavaro e plas pemp Pater, pemp Ave ha pemp Gloria Patri.

III. — Eun induljans a 200 devez, eur veach an deiz, en eur lavaret ar bedenn verr : « Jezuz, Mari, Jozeph, roit d'eomp sklerijenn ha sikour, saveteit ac'han-omp. Evel-se bezet great. »

IV. — Eun induljans a 100 devez da nep a labouro evit kreski niver an tiegeziou goestlet d'ar Famill Zantel.

V. — Eun induljans a 60 devez, ken aliez gueach : 1° ma gemerint perz e ofisou ar barrez ; 2° ma livirint pemp Pater ha pemp Ave evit ar genvreudeur maro ; 3° ma lakaïnt ar peoc'h en tiegeziou ; 4° ma labourint da zistrei var an hent mad ar re faziet ; 5° ma kemerint

soursi da rei kelennadurez vad d'ar vugale ; 6° ma raïnt eun dra all bennak evit mad ar Vreuriez.

N. B. — An oll induljansou-ze, kouls ar re blenier hag ar re all, a hell beza gounezet evit an Anaoun.

An oll oferennou lavaret evit ar genvreudeur maro, n'euz fors ouz pe aoter, ho deuz gwir d'an induljans plenier (autel privilégié).

## VI

### Mennoziou devot kinniget da genvreudeur ar Famill Zantel.

Dirak Jezuz, Mari ha Joseph, dre ar c'hoant am euz da gaout ho c'harantez hag ar Baradoz evid-oun hag evit va c'herent, me 'fell din :

1° Heulia penn-da-benn reolenn ar Vreuriez ;

2° P'eo guir eo plijet gant Jezuz, Mari ha Jozeph dont da jom en hon touez, me 'gemero soursi da gas kuit euz va zi kement a 'helfe displijout d'ez-ho ;

3° Me 'lakaio va oll evez evit derc'hell ar peoc'h hag an urz vad en tiegez ; ne c'houzanvin dirak Jezuz, Mari ha Jozeph na komzou nag oberou kontrol d'an honestiz pe d'ar garantez ;

4° Dre va skuer, me boulzo tud va zi da veza sentuz ouz lezenn Doue hag hini an Iliz, ispisial var boent santifia ar zul ;

5° Me 'boanio da c'hounit muia ma hellin a induljansou evit soulaji an Anaoun, ispisial eneou va c'herent ha re ar genvreudeur maro.

---

VU ET PERMIS D'IMPRIMER :

*Quimper, le 19 Décembre 1900.*

† FRANÇOIS-VIRGILE,

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.